

An Aluzen.

(435, suite)

Deut eo an amzer rust, èru eo ar gouân,
 Amzer eûzus d'ar paour, a zouffr a hep seurt poan :
 Ar glao, an erc'h, ar frim, ar scorn, peb fall amzer
 A laka an dud qez da zouffr peb seurt mizer.
 Ar paour, priwet a dâñ, alies eus a voed,
 Dilouer ha divoutou, e gorf paour a voelet
 Carzi oll dizolo; crena ra gant ar rion.
 Ha c'houi ve cru arvalc'h d'en lezel mont abion
 Hep dont da rei dezân un dra d'e zoulaji,
 Pa expos dec'h e boan e qichen d'or ho ty!
 Guelit ar paour-qez côs, gant e guchen bleo quenn,
 Gant e zoulagad trist, carzi marr en e benn!
 Guelit ar vam dener, qer dign eus a drue,
 O c'houlou un tam boed erit e bugale;
 Rac, daoust ma zeo-hi prest da vervel gant an naon,
 Ne deus nep interest eriti; ne deus aon
 Nemet e teufe manq a voed d'e c'hrouadur;
 Ze a rann e c'halon eus a zisphjadur.
 Mar fell desoc'h gout petra e zeo ar paourente,
 Hit, m'ho ped, christénien, hit, m'ho ped, hep dale,
 Da velet repu trist ur famill er vizer:
 Eno e velot mad paourentez an dud qer.
 Sellit var an douar, sellit piz trio-vardro,
 Na velot var peb den nemet liou ar maro.
 Sellit en ur c'hoignic, var an douar calet,
 O crena gant ar rion un den côs daou-bleguet;
 Sellit c'hoas a gostez ar mab-caer eus an ty,
 Gant rusder an amzer e crèn e izili.
 Mes, ar piz zo goassoc'h, eo quelet ar vam quéz,
 Dizec'het e feultrîn, hep nep strill banne lez
 Da vezur e buguel. Oh! tourmant an natur!
 Ne deus nemet daelou da rei d'e c'hrouadur!

(436)

(437)

Ar vugeligou guéz a gri : bara ! bara !
 An tad paour maleurus a glasq, mes neus netra.
 An tad-côs, ar mab-caër, ar vugale, ar vaim,
 Allas ! a ranco oll chom hep debri nep tam !
 Un tam goulou roussin hepgen zo alumet,
 Mes ne zeus nep tam tain da domma en oalet.
 Qerqent m'eo commancet un nebeudic an nös,
 E za ar famill baour da glasq gemer repos ;
 A boan eus dindanne ur vojadit[te] colo,
 Hac o fillou hepgen a zo deus o golo.

He bien, christenien ! ha c'houi a elfe chom

Hep rei sicour da dud o deus qer bras ezom ?
 Nan, nan, n'er gredañ get, christenien generus ;
 Ja, c'houi zicouro ho predeur maleurus.

Doae a lavar deomp dont da ober bepret

Ar pezh a garfemp - ni ve grêt en hon andret :

Greomp eta ar vad a ellomp da ober ;

Un douder vras eo ze, a dle deomp beza qer.

Sicouromp - ta ar paour, herves m'hon eus mogen :

(438)

Te eo dever peb den en em zant gür gürten.

Sicouromp ar beorien, ha bepret a propos,

Rac arabat eo demp chom atao d'o c'hortos.

Sonjomp pequer poaninus eo d'an dud delicat

Rei da c'houtout d'an oll eo o mizer anat ;

Ret eo laqat eves da ober rusia den,

Marteze dre 'r maleur forcet d'an aluzen :

Roomp a greiz calon, pa ellomp rei un dra ;

Peb gür den generus velse atao er gra.

Ar vad a rêr d'ar paour a blich calz da Zoue,

Hac an hini er gra zo contant e ene.

Oh ! ma carfet sönjal pequevement voar eurus

O tont da rei sicour d'ar paour qez maleurus,

Gant pezh hastidiguez e teufe peb christen

Da zireded gant joa da ober aluzen !

N'oc'h eus-hu get santet avichou en ho creiz

Ur joa douf, ur joa bur, pe en nos, pe en deiz,

Pa deue da zonch d'ech er fong eus ho calon,

Eus un action vad, dign a gürten gürion ?

(439)

Oh ! ma noch eus biscoas santet ur seurt boneur,

Ma noch eus get james sicouret ar maleur,

Oh ! hastit, me ho ped, da rei an aluzen,

Hac ec'h assuran d'ec'h evit quir ha certen
 Eur joa eus ar vrassa neuze incontinant,
 Hac a rai d'ho calon beza meurhet content.

Ne gredan get e ve ret gementse qelen
 Da Vreizis generus ober an aluzen :
 Ar Vretonet atao, ze n'eo get ignoret,
 A gar, e peb amzer, ober ar vad bepret.
 Rac - se, va c'henvrois, bezomp oll generus,
 Dreist oll en amzer rust, d'ar paour qez maeurur.

Truez vit an den c'os, truez d'ar vam dener,
 Truez d'an tad, truez d'ar vugaligou guer !
 E maint etal ho tor o lavaret peden :
 Soulañit o mizer d'ar beorien, christenien.
 En hano a Jesus, ganet paour en ur c'hraou,
 Bezit truez outo : mang ra de an oll draou.

Roit, roit atao, hep lagat da c'hortos ;
 An aluzen a zo ur joa a Varados.
 An draze a laga ar joa bars er galon,
 Hac a denn ouz Doue ar venediction.

Roit... ha pa deuyo an termen diveza
 Ma vezo ret neuze mont da apparissa
 Evit renta ar gont d'ar Banner. souverain,
 E lavarfet : « Me m'us s'icouret ar beorien. »
 Ha Doue, dre m'ho ho grêt vad var an douar,
 Ho recevo gant joa er p'ales eus e c'hloar.

(440)

31 gerzu 1842. A. Lédan.

(Vol. VI, p. 435-440.)